Kigenn astenner a-werzhid an arzorn  
Kigenn astenner berr a-werzhid  
Kigenn astenner a-helmo an arzorn  
Kigenn bleger don ar bizied  
Kigenn bleger bas ar bizied  
Kigenn bleger hir ar meud  
Kigenn astenner boutin ar bizied  
Kigenn astenner hir ar meud  
Kigenn astenner ar biz-yod  
Kigenn astenner ar biz-bihan.

8.4. Ar FIÑVENTEREZH.

Evit kas da benn ar fiñventerezh eo ret derc'hel diloc'h an arvrec'h: evel-se e vez harzet ouzh fiñvoù kenvelladur an ilin. A-benn henn ober e krog an ober-ataer en arvrec'h war c'horre an arzorn.

8.4.1. Ar C'HORNVENTEREZH.

Emañ an arvrec'h war an daol.

An heled zo jedet e derezioù, pezh a ampleg tresañ linenoù-daveiñ:

- linenn gostezel war ribl a-helmo an dorn hag an arvrec'h;
- linenn ahelel eus an ilin d'an arzorn;
- linenn ahelel e hauliañ ar biz-kreiz.

8.4.2. An NERZHVENTEREZH.

Kaset e vez da benn evit pep kefridiezh kac'horel.

8.4.2.1. Ar plegañ.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:  
Pouez ar c'horf;
- Muzul:

5 ha 4

Gouziviad en e azez, e arvrec'h palvasavet war an daol, distegnet kigennoù e vizied;  
Derc'hel diloc'h an arvrec'h;  
Ar gouziviad a bleg e arzorn;  
Evit prizañ nerzh kigenn bleger a-werzhid an arzorn eo lakat ar gwered-harz war ziaz eil askorn ar c'hreiz-dorn e durc'hadur an nesaat hag an astenn;  
Evit prizañ nerzh kigenn bleger a-helmo an arzorn eo lakat ar gwered-

harz war ziaz . . . pempet askorn ar  
c'hreizdom, e durc'hadur an nesaat  
hag an astenn.

3  
Gouziviad en e azez, e arvrec'h palvsav-  
et war an daol, distegnet kigennoù e  
vizied;

Derc'hel diloc'h an arvrec'h;  
Ar gouziviad a bleg e arzorn gant un  
nesadur pe ur pelladur.

2  
Gouziviad en e azez, e arvrec'h harpet  
gant an oberataer, ribl a-helmo e  
zorn war an daol, distegnet kigennoù  
e vizied;

Derc'hel diloc'h an arvrec'h;  
Ar gouziviad a bleg e arzorn en ur  
risklañ e zorn war an daol.

1 ha 0  
An oberataer a bafal stirenn kigenn  
bleger a-werzhid an arzorn war dalb-  
enn arack-diavaez an arzorn, ha  
stirenn kigenn astenner a-helmo an  
arzorn war dalbenn arack-diabarzh.

8.4.2.2. An astenn.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

Pouez ar vrec'h.

- Muzul:

5 ha 4  
Gouziviad en e azez, e arvrec'h palv-  
stouet war an daol, distegnet kig-  
ennoù e vizied;

Derc'hel diloc'h an arvrec'h;  
Ar gouziviad a astenn e arzorn;

Evit prizañ nerzh kigenn astenner a-  
werzhid an arzorn ha kigenn astenner  
berr a-werzhid eo lakaet ar gwered-  
harz war dalbenn a-gein eil ha trede  
askorn ar c'hreizdom e durc'hadur an  
nesaat hag ar plegañ;

Evit prizañ nerzh kigenn astenner a-  
helmo an arzorn eo lakaet ar gwered-  
harz war an talbenn a-gein eus pempet  
askorn ar c'hreizdom e durc'hadur ar  
pellaat hag ar plegañ.

3  
Gouziviad en e azez, e arvrec'h palv-  
stouet war an daol, distegnet kig-  
ennoù e vizied.

Derc'hel diloc'h an arvrec'h;  
Ar gouziviad a astenn e arzorn gant un  
nesadur pe ur pelladur.

2  
Gouziviad en e azez, e arvrec'h harpet  
gant an oberataer, ribl a-helmo e  
zorn war an daol, distegnet kigennoù  
e vizied;

Derc'hel diloc'h an arvrec'h;  
Ar gouziviad a astenn e arzorn en ur  
risklañ e zorn war an daol.

1 ha 0  
An oberataer a bafal stirenoù kigen-  
noù astenner an arzorn war dalbenn a-  
gein an arzorn.

8.4.2.3. Ar pellaat.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

Pouez ar vrec'h.

- Muzul :

5 ha 4

Gouziviad en e azez, e arvrec'h war an daol, distegnet kigennoù e vizied ;  
Derc'hel diloc'h an arvrec'h ;  
Ar gouziviad a bella e arzorn ;  
Ar gwered-harz zo lakaet war ribl a-werzhid an dorn.

3

Gouziviad en e azez, e arvrec'h war an daol, distegnet kigennoù e vizied, ribl a-helmo e zorn war an daol ;  
Derc'hel diloc'h an arvrec'h ;  
Ar gouziviad a bella e arzorn en ur blaenenn a-zerc'h.

2

Gouziviad en e azez, e arvrec'h war an daol, distegnet kigennoù e vizied ;  
Derc'hel diloc'h an arvrec'h ;  
Ar gouziviad a bella e arzorn en ur blaenenn a-zremm

1 ha 0

An oberataer a bafal stirenn kigenn blegar a-werzhid an arzorn, a-rez nant an talm ma'z a d'ober e ribl diabarzh.

8.4.2.4. An nesaat.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv :

Pouez ar vrec'h.

- Muzul :

5 ha 4

Gouziviad en e azez, e arvrec'h war an daol, distegnet kigennoù e vizied ;  
Derc'hel diloc'h an arvrec'h ;  
Ar gouziviad a nesa e arzorn ;

- 64 -

Ar gwered-harz zo lakaet war ribl a-helmo an dorn.

3

Gouziviad en e azez, e arvrec'h war an daol, distegnet kigennoù e vizied, ribl a-werzhid e zorn war an daol ;  
Derc'hel diloc'h an arvrec'h ;  
Ar gouziviad a nesa e arzorn en ur blaenenn a-zerc'h.

2

Gouziviad en e azez, e arvrec'h war an daol, distegnet kigennoù e vizied ;  
Derc'hel diloc'h an arvrec'h ;  
Ar gouziviad a nesa e arzorn en ur blaenenn a-zremm.

1 ha 0

An oberataer a bafal stirenn kigenn blegar a-helmo an arzorn war ribl a-helmo an arvrec'h en e lodenn izelañ.

8.5. SAVLEC'H A ARVER GWELLEK.

Mard eo ret diloc'husaat kenvelladur an arzorn dre ar surjianerezh, e vez dibabet ur savlec'h-etre o klotañ gant an arveradusted vrasañ.

Diloc'husaet e vez ar c'henvell gant :

- ur c'horn-astenn par da 45° ;

- ur c'horn-nesaat par da 15°.

Er savlec'h-se emañ gant an dorn an arveradusted vrasañ evit kregiñ en traolioù.

8.6. DISNEUZADURIOU KLEÑVEDEL.

O rannañ a reer e daou rumm :

Disneuzindurioù arzuet :

- Arlerc'hiadoù diwar dorrador (torradur  
FOUTEAU-COLLES pergen)

Disneuziadurioù kenganet : - Dorn potin...

P e v a r e   L o d e n n

K E N V E L L A D U R

A N

D O R N

A N D O R N

An dorn a c'hoarvez eus un niver bras a  
genvelloù a c'hell bezañ bodet e meur a strollad :

- Kenvelloù eskern an arzorn etrezo ;
- Kenvelloù arzorn-kreizdorn ; en o zouez  
unan zo dibar :
  - Kenvell arzorn-kreizdorn ar meud ;
  - Ar pevar kenvell arzorn-kreizdorn  
all zo heñvel an eil ouzh  
egile.
- Kenvelloù kreizdorn-oeñsoù ; en o zouez  
hini ar meud zo dibar ;
- Kenvelloù etre-kreizdorn ;
- Kenvelloù etre-oeñsoù.

Pennad IX

KENVELLOU ARZORN-KREIZDORN AR PEVAR BIZ DIWEZHAÑ

9.0. HOLLEKTERIOU.

Pevar askorn ar c'hreizdorn zo ereet d'an arzorn gant un etrelinenn a c'hoarvez eus un aridennad a genvelloù plañ a ya d'ober ur c'henvelladur empret.

9.1. KORFADUR.

Deskrivañ a raimp ar gorreennoù-kenvellañ hag an araeziou-stagañ.

9.1.1. Ar GORREENNOU-KENVELLAÑ.

A ziavaez da ziabarzh:

- eil askorn ar c'hreizdorn a goubl gant an tristurieg, an siltristurieg, ar pennog, trede askorn ar c'hreizdorn;
- trede askorn ar c'hreizdorn a goubl gant ar pennog, eil ha pevare askorn ar c'hreizdorn;
- pevare askorn ar c'hreizdorn a goubl gant ar pennog, ar bac'heg, trede ha pempet askorn ar c'hreizdorn;
- pempet askorn ar c'hreizdorn a goubl gant ar bac'heg ha pevare askorn ar c'hreizdorn.

9.1.2. An ARAEZIOU-STAGAÑ.

Tri zo anezho:

- ar poure had,
- ar stagelloù a-baly arzorn-kreis-

dorn;  
- ar stagelloù a-gein arzorn-kreiz-  
dorn.

9.1.2.1. Ar POURC'HAD.

Pevar askorn ar c'hreizdorn diwezhañ zo erc'het d'an  
arzorn gant ur pourc'had moan stegnet eus an eil gorre-  
enn-genvellañ d'eben. Kreñvaet eo gant ar stagelloù arz-  
orn-kreizdorn.

9.1.2.2. Ar stagelloù a-balv arzorn-kreizdorn.

Seizh zo anezho, stegnet:

- an hini gentañ eus an tristurieg da eil ha da  
drede askorn ar c'hreizdorn;
- an eil eus an tristurieg da drede askorn ar  
c'hreizdorn;
- an teirvet, ar pedervet, ar pempet eus ar penn-  
og da eil, trede ha pevare askorn ar c'hreizdorn;
- ar c'hwec'hvet hag ar seizhvet eus ar bac'heg  
da bempet askorn ar c'hreizdorn.

9.1.2.3. Ar stagelloù a-gein arzorn-kreizdorn

C'hwec'h zo anezho, stegnet:

- an hini gentañ hag an eil eus an tristurieg hag  
eus an eil-tristurieg da eil askorn ar c'hreizdorn;
- an teirvet hag ar pedervet eus ar pennog da  
drede askorn ar c'hreizdorn;
- ar pempet eus ar pennog da pevare askorn ar  
c'hreizdorn;
- ar c'hwec'hvet eus ar pennog da bempet askorn  
ar c'hreizdorn.

Ouzhpenn-se emañ ar stagelloù etre-  
kreizdorn oc'h eren kenetrezo eil ha trede askorn ar  
c'hreizdorn, trede ha pevare askorn ar c'hreizdorn, pev-

are ha pempet askorn ar c'hreizdorn.

9.2. Ar FIÑVOU.

Eus fiñvoù a blegañ, a astenn, a bellaat, a nesaat ez  
eus anv amañ.

Ar riskladurioù-se, dister o heled, zo bevnet gant  
ar stagelloù a-balv hag a-gein, ha gant an etrelinenn  
hec'h-unan.

9.3. Ar C'HIGENNOU-LOC'HAÑ.

Kigennoù astenner ha pleger ar bizied, kigennoù etre-  
eskernek an dorn, a ro fiñv d'ar c'henvelloù-se, a gefl-  
oc'h gant ar c'henvelloù kreizdorn-oc'hoù. Studiet e  
vint pelloc'h.

9.4. Ar FIÑVVENTEREZH.

En abeg eus distervez an heledoù e vez evshaet ar  
fiñvoù ha ne vez jedet nag ar c'herventerezh nag an  
nerzhventerezh.

9.5. SAVLEC'H A ARVER GWELLEK.

Mard eo ret diloc'husaat ar c'henvelloù arzorn-kreiz-  
dorn dre ar surjianerezh, e vez dibabet ar savlec'h-  
steudadur eskern ar c'hreizdorn e-keñver an arzorn.

9.6. DISNEUZIADURIOU KLEÑVEDE

O rannañ a reer e daou rumm:

Disneuziadurioù arzeust:

- Arlerc'hiadoù diwar gorrador;
- Artroz;

Disneuziadurioù kenganet:

- Dorn potin.

Pennad X  
KENVELL ARZORN-KREIZDORN AR MEUD

10.0. HOLLEKTERIOU.

Ur c'henvell dibrek eo a laka e dar-  
empred an tristurieg ha kentañ askorn ar c'hreizdorn.

10.1. KORFADUR.

Deskrivañ a raimp ar gorreennoù-  
kenvellañ hag an arnezioù-stagañ.

10.1.1. Ar GOR BENNOU-KENVELLAÑ.

- Talbenn izelañ an tristurieg:

dibrek eo, argev a ziabarzh da ziavaez, kein-  
ek a ziaraog da ziadreñv, tro ouzh traoñ ouzh diavaez.

E kenvell emañ gant diaz an askorn-kreizdorn kentañ

Hemañ zo dibrek ivez, hogen keinek a ziabarzh  
da ziavaez, hag argev a ziaraog da ziadreñv.

10.1.2. An ARNEZIOU-STAGAÑ.

Ar pourc'had zo laosk ha moan. Enledet emañ tro-dro  
d'ar gorreennoù-kenvellañ. Krevet eo gant stagelloù:  
unan anezho, ar stagell adreñv-diabarzh a groaz beskell-  
ek talbennoù adreñv ha diabarzh ar c'henvell.

10.2. Ar FIÑVOU.

Er c'henvell-se eo a c'hoarvez an darnvuiañ eus  
fiñvoù ar meud, pezh a aotre dezhañ en em zure'haat e-  
keñver palv an dorn.

Ar fiñvoù a c'hoarvez eus:

- plegañ - astenn - pellaat - nesnat.

10.2.1. Ar PLEGañ.

Plegañ zo anezhañ kas ar meud war ziaraog ar palv.

10.2.1.1. Ahel ar plegañ.

Durc'haet emañ diaraok-diavaez.

Tremen a ra dre etrelinenn ar c'henvelloù.

10.2.1.2. Savlec'h-derou.

Emañ an ezel-krec'h a-hed ar c'horf, palv an dorn tre ouzh diaraog.

10.2.1.3. Deskrivadur ar fiñv.

- Fiñv hollat: ar meud a dosta ouzh ar palv. Mont a ra war-raok war-ziabarzh.

- Fiñv ar gorreannoù-kenvellañ: diaz an askorn-kreiz-dorn kentañ a riskl war an tristurieg, a ziadreñv da ziaraog.

10.2.1.4. Heled hollel ar plegañ-astenn.

40°.

10.2.1.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant:

- arc'hwel ar c'henvell;

- stek an tristurieg ouzh ar skafeg.

10.2.2. An ASTENN.

Astenn zo anezhañ kas ar meud bet pleget war-du plaennenn ar palv.

10.2.2.1. Ahel an astenn.

An hevelep hini hag hini ar plegañ.

10.2.2.2. Savlec'h-derou.

An hevelep hini hag hini ar plegañ.

10.2.2.3. Deskrivadur ar fiñv.

- Fiñv hollat: ar meud a bella diouzh ar palv. Mont a ra war-dreñv war-ziavaez.

- Fiñv ar gorreannoù-kenvellañ: diaz an askorn-kreiz-dorn kentañ a riskl war an tristurieg a-ziaraog da ziadreñv.

10.2.2.4. Heled hollel an astenn-plegañ.

40°.

10.2.2.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant:

- stegnadur ar stagell adreñv-diabarzh;

- stegnadur ar c'higennoù lec'hiet e tachad kentañ ar c'hreizdorn.

10.2.3. Ar PELLAAT.

Pellaat zo anezhañ kas ar meud war ziavaez en ur blaennenn a-dal.

10.2.3.1. Ahel ar pellaat.

Durc'haet eman diaraok-diavaez.

Tremen a ra dre greiz diaz ar c'hentañ askorn-kreiz-dorn.

10.2.3.2. Savlec'h-derou

An hevelep hini hag hini ar plegañ.

10.2.3.3. Deskrivadur ar fiñv.

- Fiñv hollat: ar meud a bella diouzh ahel an dorn.

- Fiñv ar gorreannoù-kenvellañ: kentañ askorn ar c'hreizdorn a riskl war an tristurieg a ziabarzh da ziavaez, hag elloc'h en-dro d'ar ahel a-hed war an dro.

10.2.3.4. Heled hollel ar pellaat-mesaat.

40°.

10.2.3.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant:

- arc'hwel ar c'henvell;
- stegnadur ar c'higennoù lec'hiet e tachad kent-  
añ ar c'hreizdorn.

10.2.4. An NESAAAT.

Nesaat zo anezhañ kas ar meud war ziabarzh en ur blaenenn a-dal.

10.2.4.1. Ahel an nesaat.

An hevelep hini hag hini ar pellaat.

10.2.4.2. Savlec'h-derou.

An hevelep hini hag hini ar pellaat.

10.2.4.3. Deskrivadur ar fiñv.

- Fiñv hollat: kentañ askorn ar c'hreizdorn a ya war-  
du talbenn diavaez an eil.

- Fiñv ar gorreannoù-kenvellañ: kentañ askorn ar  
c'hreizdorn a riskl war an tristurieg a ziavaez da  
ziabarzh hag eloc'h en-dro d'e ahel a-hed war an dro.

10.2.4.4. Heled hollet an nesaat-pellaat.

40°.

10.2.4.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant:

- Stok ar c'higennoù etrezo.

10.3. Ar C'HIGENNOU-LOC'HAN.

Evit pep fiñv eo roet:

- Roll ar c'higennoù pennañ diouzh un tu;
- Roll ar c'higennoù a eil renk diouzh an tu all.

10.3.1. Ar plegañ.

10.3.1.1. Kigenn bennañ:

- Kigenn bleger berr ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENNADUR
Kigenn bleger berr ar meud	- Penn bas: ribl izelañ kab- estr ar plegerioù - Torzhell an tristurieg. - Penn don: talbenn arak an eiltristurieg hag ar pennog	Diaz oeñs kentañ ar meud war an dorzhell diavaez	Penn bas: nervenn greizer  Penn don: nervenn an helmo

10.3.1.2. Kigennoù a eil renk:

- Kigenn bleger hir ar meud;
  - Kigenn bellaer berr ar meud
  - Kigenn nesaer ar meud
- { a  
vlegn  
ar  
fiñv

10.3.2. An Astenn.

10.3.2.1. Kigenn bennañ:

- Kigenn astenner berr ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
Kigenn astenner berr ar meud	Talbenn adreñv ar werzhid war e drederenn greiz	Diaz oeñs nesañ ar meud war e dalbenn a-gein	Nervenn ar werzhid

10.3.2.2. Kigennoù a eil renk:

- Kigenn astenner hir ar meud;  
- Kigenn bellaer hir ar meud.

10.3.3. Ar pellaat.

Kigennoù:

- Kigenn bellaer hir ar meud;  
- Kigenn bellaer berr ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
kigenn bellaer hir ar meud	Talbenn adreñv: ar werzhid, an helmo, ha lienenn etreeskernel an arvrec'h	Diaz kentañ askorn ar c'hreizdom war an dorzhell diavaez	Nervenn ar werzhid
Kigenn bellaer berr ar meud	- Torzhell ar skafeg - Kabestr ar plegerioù	Diaz oeñs nesañ ar meud war an dorzhell diavaez	Nervenn greizer

10.3.4. An nesaat.

10.3.4.1. Kigenn bennañ:

- Kigenn nesaer ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENNADUR
Kigenn nesaer ar meud	Tristurieg ha pennog Eil ha trede askorn ar c'hreizdom war o diaz hag o zalbenn araok	Diaz oeñs nesañ ar meud, war an dorzhell diabarzh	Nervenn an helmo

10.3.4.2. Kigennoù a eil renk:

- Kigenn rageneber ar meud;  
- Kigenn astenner hir ar meud.

10.4. Ar FIÑVVENTEREZH.

Evit kas da benn ar fiñvventerezh eo ret derc'hel diloc'h an dorn.

10.4.1. Ar C'HORNVENTEREZH.

Ne vez ket jedet, hogen prizet dre geñveriañ gant an dorn all.

10.4.2. An NERZHVENTEREZH.

Evit ar plegañ hag an astenn ne vez ket kaset da benn er pleustr fiñvoù kenvell arzorn-kreizdorn ar meud hep fiñvoù ar c'henvell kreizdorn-oeñs na re ar c'henvell etre-oeñsoù. Setu perak emañ ar plegañ-astenn da vezañ studiet er pennad XII.

10.4.2.1. Ar pellaat.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

Pouez an arvrec'h hag an dorn;

Arc'hwel kigemoù nesaer an arzorn.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn;
- Derc'hel diloc'h pevar askorn diwezhañ ar c'hreizdorn hag an arzorn;
- Ar gouziviad a bella e veud;
- Ar gwered-harz zo lakaet war ribl diavaez oeñs nesañ ar meud.

3

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn;
- Derc'hel diloc'h pevar askorn diwezhañ ar c'hreizdorn hag an arzorn;
- Ar gouziviad a bella e veud en ur blaenenn a-zerc'h, eus traoñ da grec'h.

2

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn;
- Derc'hel diloc'h pevar askorn diwezhañ ar c'hreizdorn hag an arzorn;
- Ar gouziviad a bella e veud en ur blaenenn a-zremm.

1 ha 0

- An oberataer a bafal gwiemoù kigenn bellaer berr ar meud war ar c'hourbozenn. Stirenn kigenn bellaer hir ar meud a c'hell bezañ pafalet nes d'hec'h enlenadur.

10.4.2.2. An nesaat.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

Pouez an dorn.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn;
- Derc'hel diloc'h pevar askorn diwezhañ ar c'hreizdorn;
- Ar gouziviad a nesa e veud;
- Ar gwered-harz zo lakaet war ribl diabarzh an oeñs nesañ.

3

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn;
- Derc'hel diloc'h pevar askorn ar c'hreizdorn
- Ar gouziviad a nesa e veud en ur blaenenn a-zerc'h eus traoñ da grec'h.

2

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn;
- Derc'hel diloc'h pevar askorn diwezhañ ar c'hreizdorn;
- Ar gouziviad a nesa e veud en ur blaenenn a-zremm.

1 ha 0 - An oberataer a bafal gwiennañ ar gig-  
war ar  
enn nesaer c'hourbozenn.

10.5. SAVLEC'H A ARVER GWELLEK.

Mard eo ret diloc'husaat kenvell arzorn-kreizdom ar  
meud dre ar surjianerezh, e vez dibabet ur savlec'h o  
klotañ gant arveradusted vrasañ ar meud.

Diloc'husaet e vez ar c'henvell gant ur c'horn-plegañ  
dister ur c'horn-nesaat dister ivez.

10.6. DISNEUZADURIOU KLEÑVEDEL.

Diloc'husadurioù kleñvedel da heul disfiñvadurioù re  
bell.

Pennad XI

KENVELLOU KREIZDORN-OEÑSOU

AR PEVAR BIZ DIWEZHAÑ

11.0. HOLLEKTERIOU.

Kenvelloù boulllek anezho hervez ar  
vededouriezh a liamm eskern ar c'hreizdorn ouz an  
oeñsoù nesañ.

11.1. KORFADUR.

Deskrivañ a raimp ar gorreennoù-  
kenvellañ hag an araezioù-stagañ.

11.1.1. Ar GORREENNOU-KENVELLAÑ.

Pep biz a ziskouez :

- penn an askorn-kreizdorn;
- diaz an oeñs nesañ;
- an disk-kenvellañ.

11.1.1.1. Penn an askorn-kreizdorn.

Dezhañ stumm lodenn ur voull, emañ e kenvell gant  
diaz an oeñs nesañ.

11.1.1.2. Diaz an oeñs nesañ.

Argev a bep tu, bihanoc'h eget penn an askorn-kreiz-  
dorn, un disk-kenvellañ o reiñ astenn dezhañ.

11.1.1.3. An disk-kenvellañ.

Lorikenn stirek enlemt war ribl diaraok diaz an  
oeñs, e ro astenn ha donder dezhañ. Evel-se e tiogel  
kevazaster ar gorreennoù-kenvellañ.

11.1.2. An ARAEZIOU-STAGAÑ.

Tri zo anezho :

- ar pourc'had ;
- ar stagelloù kengostezel ;
- stagell vas a-dreuz ar c'hreizdorn.

11.1.2.1. Ar pourc'had.

Moan ha laosk, emañ enlenet e-kefin an disk-kenvelañ.

11.1.2.2. Ar stagelloù kengostezel.

Fetis-tre, start, lec'hiet war dalbenn kostezel ar c'henvell.

Enlenet a bep tu eus penn an askorn-kreizdorn, e vez diforc'het div hordenn :

- hordenn askorn-kreizdorn-oeñs staget ouzh gourfenn nesañ an oeñs ;
- hordenn askorn-kreizdorn-disk-kenvelañ staget ouzh an disk-kenvelañ.

11.1.2.3. Stagell vas a-dreuz ar c'hreizdorn.

Stegnet eus an eil askorn-kreizdorn d'ar pempet en ur dreuziñ talbenn a-balv ar c'henvelloù, emañ liammet ouzh an disk-kenvelañ.

11.2. Ar FIÑVOU.

Pep kenvell kreizdorn-oeñs zo ar sez a fiñvoù niverus :

- plegañ,
- astenn,
- pellant-nesant,
- treiñ (gouzañvat),
- andreiñ.

11.2.1. Ar PLEGAÑ.

Plegañ zo anezhañ kas ar bizied war-raok en ur blaen-

enn a-saezh.

11.2.1.1. Ahel ar plegañ.

A-zremm emañ, lec'hiet en ur blaenenn a-dal. Tremenn a ra dre penn askorn ar c'hreizdorn.

11.2.1.2. Savlec'h-derou.

Emañ an ezel-krec'h a-hed ar c'horf, palv an dorn tro ouzh diaraog, meud ouzh diavaez.

11.2.1.3. Deskrivadur ar fiñv :

- Fiñv hollat :

- talbenn a-balv an oeñsoù nesañ a dosta ouzh palv an dorn ;
- gourfenn pellañ ar bizied a zilec'h a drañ da grec'h hag a ziadreñv da ziaraog o luniañ ur warenn gerc'h en ur blaenenn a-saezh.

- Fiñv ar gorreannoù-kenvelañ :

- gourfenn nesañ an oeñs a riskl war benn askorn ar c'hreizdorn a ziadreñv da ziaraog. E diwezh ar fiñv emañ kaset an disk-kenvelañ dirak ar c'henvell.

11.2.1.4. Heled.

90° mar bez plegat an holl vizied a-gevret.

Dihanoec'h eo an heled mar bez plegat ur biz hepken o vezañ m'emañ stegnet stagell vas a-dreuz ar c'hreizdorn.

11.2.1.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant :

- stok ribl arnok gourfenn nesañ an oeñs ouzh penn askorn ar c'hreizdorn ;
- an disk-kenvelañ en arnok ;
- stegnadur ar c'higennoù astenner ;

- stegnadur ar pourc'had.

11.2.2. An ASTENN.

Astenn zo anezhañ kas ar bizied war-dreñv en ur blaenenn a-saezh.

11.2.2.1. Ahel an astenn.

An hevelep hini hag hini ar plegañ.

11.2.2.2. Savlec'h-derou

An hevelep hini hag hini ar plegañ.

11.2.2.3. Deskrivadur ar fiñv.

- Fiñv hollat :

- talbenn a-balv an oeñsoù a bella diouzh palv an dorn;

- gourfenn pellañ ar bizied a zilec'h a drañ da grec'h hag a ziaraog da ziadreñv o luniañ ur warenn gelc'h en ur blaenenn a-saezh.

- Fiñv ar gorreennoù-kenvellañ:

- gourfenn nesañ an oeñs a riskl war penn askorn ar c'hreizdom a ziaraog da ziadreñv.

11.2.2.4. Heled.

Kemmus hervez ar c'houzividi:

- oberiat: bez' e c'hell tizhout 30°-40°;

- gouzañvat: bez' e c'hell tizhout 90°.

11.2.2.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant stegnadur ar stagelloù ken-gostezel.

11.2.3. Ar PELLAAT-NESAAT.

Eus fiñvoù kostezel ez eus anv amañ. Ar biz-yod zo heled e fiñv an hini brasañ, ar biz-kreiz an hini dist-ernañ.

11.2.3.1. Aheliou ar pellaat-nesaat.

A-zremm emaint, lec'hiet en ur blaenenn a-saezh. Treemen a reont dre benn pep askorn-kreizdom.

11.2.3.2. Savlec'h-derou.

An hevelep hini hag hini ar plegañ.

11.2.3.3. Deskrivadur ar fiñv.

- Fiñv hollat: ar bizied a dosta ouzh ahel a-hed ar c'horf pe a bella dioutañ.

- Fiñv ar gorreennoù-kenvellañ: gourfenn nesañ an oeñs a riskl ent-kostezel war benn askorn ar c'hreizdom.

11.2.3.4. Heled hollat ar pellaat-nesaat.

- biz-yod: 40°

- biz-kreiz: 10°

- biz-gwalenn ha biz-bihan: 30°.

11.2.3.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant stegnadur ar stagelloù ken-gostezel.

11.2.4. An TREIN.

Eus fiñvoù gouzañvat ez eus anv amañ.

Bennozh da laoskennez ar stagelloù e c'hell an heled tizhout 60°.

11.2.5. An AMDREIN.

Amdrein zo anezhañ plegañ, astenn, pellaat, nesaat war un dro.

Pep biz a c'haller meizañ evel ganerenn ur gernerenn a zo he diaz luniet gant e c'hourfenn.

Ne c'hell an heled mont dreist da heled ar fiñvoù liesseurt a ya d'ober an amdrein.

Ar bevennadurioù zo re ar fiñvoù e kennoz.

11.3. Ar C'HIGENNOU-LOC'HAÑ.

Evit pep fiñv eo roet:

- roll ar c'higennoù pennañ diouzh un tu;
- roll ar c'higennoù a eil renk diouzh an tu all.

11.3.1. Ar PLEGAÑ.

11.3.1.1. Kigennoù pennañ:

- Kigennoù buzhugennek an dorn;
- Kigennoù etreeskernel a-gein;
- Kigennoù etreeskernel a-balv.

KIGENN	PENN	DIEBENN	NERVENN-ADUR
Kigennoù buzhugennek an dorn ( peder anezho )	War stirenoù kigenn bleger don ar bizied - an hini gentañ hag an eil war ar ribl diavaez ha war an talbenn araok eus stirenoù ar biz-yod hag ar biz-kreiz - an teirvet war ar ribloù kefin eus stirenoù ar biz-kreiz hag ar biz-gwalenn - ar pedervet war ar ribloù kefin eus stirenoù ar biz-gwalenn hag ar biz-bihan	Pep hini war ar ribl diavaez eus stirenn kigenn astenn-er boutin ar bizied	Kigennoù buzhugennek diavaez: nervenn greizer; Kigennoù buzhugennek diabarzh: nervenn an helmo
Kigennoù etreeskernel a-gein ( 4 anezho )	Pep hini war an talbenn kostezel eus 2 askorn ar c'hreizdorn o vevonnañ an tachad m'emañ lec'hiet	Diaz oeñs nesañ ar 4 biz diwezhañ	Nervenn an helmo
Kigennoù etreeskernel a-balv ( 4 anezho )	Kentañ, eil, pevare, pempet askorn ar c'hreizdorn war o zalbenn araok	Diaz oeñs nesañ ar meud, arb.-yod b.-gwal. b.-bihan	Nervenn an helmo

11.3.1.2. Kigennoù a eil renk:

- Kigenn bleger berr ar biz-bihan;
- Kigenn bleger bas ar bizied;
- Kigenn bleger don ar bizied.

11.3.2. An ASTENN.

Kigennoù:

- Kigenn astenner boutin ar bizied;
- Kigenn astenner ar biz-yod;
- Kigenn astenner ar biz-bihan.

KIGENN	PENN	DIEBENN	NERVENN-ADUR
Kigenn astenner boutin ar bizied	Arskodenn gost-ezel ar paler	Feder stirenn pep hini anezho enlenet war ziaz pep oeñs	Nervenn ar werzhid
Kigenn astenner ar biz-yod	Talbenn adreñv an helmo war lodenn izelañ an dreuzenn	War dri oeñs ar biz-yod	Nervenn ar werzhid
Kigenn astenner ar biz-bihan	Arskodenn gost-ezel ar paler	War dri oeñs ar biz-bihan	Nervenn ar werzhid

11.3.3. Ar BELLAAT.

Kigemoù:

- Kigemoù etreaskernel a-gein ;
- Kigonn bellaer ar biz-bihan.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
Kigemoù etreaskernel a-gein ( 4 anezho )	Pep hini war an talbenn kostezel eus 2 askorn ar c'hreizdorn o vevennañ an tachad m'emañ lec'hiet	Diaz oñs nesañ ar 4 biz diwezhañ	Nervenn an helmo
Kigonn bellaer ar biz-bihan	Pizenneg	Diaz oñs nesañ ar biz bihan Stirenn kigonn astenner ar biz bihan	Nervenn an helmo

11.3.4. An NESAAAT.

Kigonn:

- Kigemoù etreaskernel a-balv.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
Kigemoù etreaskernel a-balv ( 4 anezho )	1ñ, 2l, 4e, 5t askorn ar c'hreizdorn war o zalbenn araok	Diaz oñs nesañ ar meud, ar biz-yod, ar biz-gwalonn hag ar biz-bihan	Nervenn an helmo

11.4. Ar FIÑVVENTEREZH.

Evit kas da benn ar fiñvventerezh eo ret dere'hel diloc'h an dorn. Ar bizied nemeto a fiñv.

11.4.1. Ar C'HORNVENTEREZH.

An holed zo jedet e derezioù. N'eo ket ret tresañ linennoù, ar bizied o-unan o talvezout da zaveoù.

11.4.2. An NERZHVENTEREZH.

Kaset e vez da benn ovit ar plegañ, an astenn, ar pellant, an nesaat. N'eo ket prizet an treiñ, o vezañ m'eo gouzañvat.

11.4.2.1. Ar plegañ.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

Pouez ar vroc'h.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol;
- Dere'hel diloc'h eskern ar c'hreizdorn;
- Ar gouziviad a bleg<sup>war</sup> e arzorn e vizied astennet;
- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn araok an oñsoù nesañ.

3

- Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol;
- Dere'hel diloc'h eskern ar c'hreizdorn;
- Ar gouziviad a bleg war e arzorn e vizied astennet.

2

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, tro cuzh traoñ ar ribl diabarzh anezhañ;
- Dere'hel diloc'h eskern ar c'hreizdorn;

11.3.3. Ar BELLAAT.

Kigennoù:

- Kigennoù etreeskernel a-gein ;
- Kigenn bellaer ar biz-bihan.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
Kigennoù etreeskernel a-gein ( 4 anezho )	Pep hini war an talbenn kostezel eus 2 askorn ar c'hreizdorn o vevennañ an tachad m'emañ lec'hiet	Diaz oñs nesañ ar 4 biz diwezhañ	Nervenn an helmo
Kigenn bellaer ar biz-bihan	Pizenneg	Diaz oñs nesañ ar biz bihan Stirenn kigenn astenner ar biz bihan	Nervenn an helmo

11.3.4. An NESAAT.

Kigenn:

- Kigennoù etreeskernel a-balv.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
Kigennoù etreeskernel a-balv ( 4 anezho )	1a, 2l, 4e, 5t askorn ar c'hreizdorn war o zalbenn araok	Diaz oñs nesañ ar meud, ar biz-yod, ar biz-gwelenn hag ar biz-bihan	Nervenn an helmo

11.4. Ar FIÑVVENTEREZH.

Evit kas da benn ar fiñvventerezh eo ret dere'hel diloc'h an dorn. Ar bizied nemeto a fiñv.

11.4.1. Ar C'HORNVENTEREZH.

An heled zo jedet e dereziou. N'eo ket ret tresañ linennoù, ar bizied o-unan o talvezout da zaveoù.

11.4.2. An NERZHVENTEREZH.

Kaset e vez da benn evit ar plegañ, an astenn, ar pellaat, an nesaat. N'eo ket prizet an treiñ, o vezañ m'eo gouzañvat.

11.4.2.1. Ar plegañ.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

Pouez ar vrec'h.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol;
- Dere'hel diloc'h eskern ar c'hreizdorn;
- Ar gouziviad a bleg<sup>war</sup> e arzorn e vizied astennet;
- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn araok an oñsoù nesañ.

3

- Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol;
- Dere'hel diloc'h eskern ar c'hreizdorn;
- Ar gouziviad a bleg war e arzorn e vizied astennet.

2

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, tro cuzh traoñ ar ribl diabarzh anezhañ;
- Dere'hel diloc'h eskern ar c'hreizdorn;

- Ar gouziviad a bleg war e arzern e vizied astennet.

1 ha 0

- An oberataer a bafal ar c'higennoù buzhugemlek war dalbenn araok an oeñsoù nesañ.

11.4.2.2. An astenn.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

- Pouez ar vrec'h;

- Arc'hwel kigennoù pleger an arzern.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, pleget e vizied;

- Derc'hel diloc'h eskern ar c'hreiz-dorn;

- Ar gouziviad a astenn an oeñsoù nesañ;

- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn a-gein an oeñsoù nesañ.

3

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, tro ouzh traoñ ar palv anezhañ, pleget e vizied;

- Derc'hel diloc'h eskern ar c'hreiz-dorn;

- Ar gouziviad a astenn e oeñsoù nesañ.

2

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, tro ouzh traoñ ar ribl diabarzh anezhañ;

- Derc'hel diloc'h eskern ar c'hreiz-dorn;

- Ar gouziviad a astenn e oeñsoù nesañ.

1 ha 0

- An oberataer a bafal stirenoù ar

c'higennoù astenner war gein an dorn.

11.4.2.3. Ar pellaat.

- Diloc'haat ar fiñv:

- Strizhadur kigenn bleger a-holmo an arzern;

- Pouez an dorn.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, tro ouzh traoñ ar palv anezhañ, e vizied nesaet;

- Derc'hel diloc'h eskern ar c'hreiz-dorn;

- Ar gouziviad a bella e vizied;

- Ar gwered-harz zo lakaet:

- Evit prizañ nerzhventerezh ar gentañ hag an teirvet kigenn etreeskernel, war ribl diavaez ar biz-yod ha war ribl diabarzh ar biz-kreiz;

- Evit prizañ nerzhventerezh an eil hag ar pedorvet kigenn etreeskernel, ha kigenn bellaer ar biz-bihan, war ribl diavaez ar biz-gwalenn hag ar biz-bihan ha war ribl diabarzh ar biz-kreiz.

3 ha 2

- Gouziviad en e azez, palv e zorn war an daol nesaet e vizied;

- Ar gouziviad a bella e vizied:

- en un doare hollel: notenn 3;

- en un doare darnel: notenn 2

1 ha 0

- An oberataer a glask pafalañ ar c'hig-

ennoù etreskernel a-gein etre esk-  
ern ar c'hreizdorn.

11.4.2.4. An nesaat.

- Diloc'haat ar fiñv:

Pouez an dorn.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn,  
tro ouzh traoñ ar palv anezhañ,  
pellaet e vizied;
- Ar gouziviad a nesa e vizied;
- Ar gwered-harz zo lakaet war ribl  
diabarzh ar biz-yod ha war ribl  
diavaez ar biz-gwalenn hag ar biz-  
bihan.

3 ha 2

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn,  
tro ouzh traoñ, ar palv anezhañ,  
pellaet e vizied;
- Ar gouziviad a nesa e vizied:
  - En un doare hollet: notenn 3;
  - En un doare darnel: notenn 2.

1 ha 0

- An oberataer a bafal ar c'higennoù  
etreskernel a-balv war dalbenn  
diavaez ar biz-yod, ar biz-gwalenn,  
hag ar biz-bihan.

11.5. SAVLEC'H A ARVER GWELLEK.

Mard eo ret diloc'husaat kenvelloù kreizdorn-oeñsoù  
dre ar surjianerezh, e vez dibabet ur savlec'h-etre o  
klotañ gant an arveradusted vrasañ, eleze ar bizied  
pleget un tammig e sez an tri c'henvell anezho. Heled

ar plegañ a ya war gresk eus ar biz-yod d'ar biz-bihan.

11.6. DISNEUZADURIOU KLEÑVEDEL.

Sellout ouzh 13.6.

Pennad XII  
KENVELL KREIZDORN-OEÑS AR MEUD

12.0. HOLLEKTERIOU.

Ur c'henvell boullek anezhañ hervez ar vevedouriezh - a liamm kentañ askorn ar c'hreizdorn ouzh an oeñs nesañ kentañ.

12.1. KORPADUR.

Deskrivañ a raimp ar gorreennoù-kenvellañ hag an araezioù-stagañ.

12.1.1. Ar GORRENNOU-KENVELLAÑ.

Evel ar pevar biz all e tiskouez ar meud :

- penn an askorn-kreizdorn kentañ;
- diaz an oeñs nesañ kentañ;
- an disk-kenvellañ.

12.1.1.1. Penn an askorn-kreizdorn kentañ.

Dezhañ stumm lodenn ur voull, emañ e kenvell gant diaz an oeñs nesañ kentañ

12.1.1.2. Diaz an oeñs nesañ kentañ.

Argev a bep tu; bihanoc'h eget penn an askorn-kreizdorn, un disk-kenvellañ o reiñ astenn dezhañ.

12.1.1.3. An disk-kenvellañ.

Lorikenn stirek enlenet war ribl diarnok diaz an oeñs, e ro astenn ha donder dezhañ. Evel evit ar pevar biz all, e tiogel kevazaster ar gorreennoù-kenvellañ; en e devder avat ez eus daou askornik sezamek na emañ enlenet ar stag-

elloù kreizdorn-oeñs.

12.1.2. An ARABZIOU-STAGAN.

Tri zo anezho :

- ar pourc'had ;
- ar stagelloù kengostezel ;
- ar stagelloù kreizdorn-oeñs.

12.1.2.1. Ar pourc'had.

Moan ha laosk, emañ enlennet e-kefin an disk-kenvellañ.

12.1.2.2. Ar stagelloù kengostezel.

Lec'hiet emaint war dalbenn kostezel ar c'henvell.

12.1.2.3. Ar stagelloù kreizdorn-oeñs.

Dezho hordennoù-eeun hag e-kroaz a stag an eskern sezamek ouzh an oeñs hag ouzh an askorn-kreizdorn.

12.2. Ar FINVOU.

Kenvell kreizdorn-oeñs ar meud zo ar sez a fiñvoù niverus :

- plegañ ;
- pellaat-nesaat ;
- treiñ.

12.2.1. Ar PLEGAÑ.

Ar plegañ zo e ahel a-zremm, durc'haet diaraok diavaez.

Tremen a ra dre greiz penn an askorn-kreizdorn. An heled a dizh 75°-80°.

Notenn: an astenn, gouzañvat zoken, n'eus ket anzhañ.

12.2.2. Ar PELLAAT-NESAAT.

Ar pellaat-nesaat zo e ahel a-zremm, durc'haet diaraok diabarsh.

Tremen a ra ivez dre greiz penn an askorn-kreizdorn.

An heled zo dister, un nebeut derezioù hepken.

12.2.3. Ar TREIÑ.

Treiñ a ra an oeñs en-dro d'e ahel a-hed e-keñver askorn ar c'hreizdorn.

Dre harpañ ar meud war ar biz-yod e c'haller lakaat an oeñs da dreiñ pe war-ziabarsh pe war-ziavaez.

An heled zo dister, un nebeut derezioù hepken.

12.3. Ar C'HIGENNOU-LOC'HAÑ.

Ne vo studiet amañ dindan nemet ar gigenn bleger hag ar gigenn astenner, o vezañ m'eo dister ar fiñvoù all.

12.3.1. Ar plegañ.

Kigenn bleger berr ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
Kigenn bleger berr ar meud	- Penn bas : ribl izelañ kabestr ar plegerioù torzhell an trist-urieg	Diaz oeñs kentañ ar meud war an dorzhell diavaez	Nervenn greizer
	- Penn don : talbenn arack an eiltristurieg hag ar pennog		Nervenn an helmo

12.3.2. An astenn.

Kigenn astenner hir ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENN-ADUR
Kigenn astenner ar meud	Ribl a-dreñv ar werzhid en e dred-erenn greiz	Diaz oeñs pellañ ar meud war dalbenn a-gsin	Nervenn ar werzhid

12.4. Ar FIÑVVENTEREZH.

Evit kas da benn ar fiñvventerezh eo ret dere'hel diloc'h kentañ askorn ar c'hreizdorn.

12.4.1. Ar C'HORNVENTEREZH.

Prizet e vez ar c'horn etre an oeñs kentañ ha kentañ askorn ar c'hreizdorn.

12.4.2. An NERZHVENTEREZH.

Kaset e vez da benn evit ar plegañ hag an astenn.

12.4.2.1. Ar plegañ.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

Pouez an arvrec'h hag an dorn.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol;
- Dere'hel diloc'h kentañ askorn ar c'hreizdorn;
- Ar gouziviad a bleg oeñs nesañ ar meud;
- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn araok an oeñs nesañ.

1 ha 0

- An oberataer a bafal kigenn bleger berr ar meud war dalbenn araok kentañ askorn ar c'hreizdorn.

Notenn: ne vez ket prizet an derezioù 3, 2.

12.4.2.2. An astenn.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:

- Pouez an arvrec'h hag an dorn;

- Arc'hwel kigennoù nesaer an arzorn.

- Muzul:

5 ha 4

- Gouziviad en e azez, e zorn war an

daol;

- Dere'hel diloc'h kentañ askorn ar c'hreizdorn;
  - Ar gouziviad a astenn oeñs nesañ ar meud;
  - Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn adreñv an oeñs nesañ.
- 1 ha 0
- An oberataer a bafal stirenn kigenn astenner berr ar meud war ziaz kentañ askorn ar c'hreizdorn.

Notenn: ne vez ket prizet an derezioù 2, 3.

12.5. SAVLEC'H A ARVER GWELLEK.

Evel ar bizied all, e vez pleget un tammig ar meud evit an arveradusted vrasañ anezhañ.

12.6. DISNEUZIADURIOU KLEÑVEDEL.

Sellout ouzh 13.6.

13.0. HOLLEKTERIOU.

Kenvelloù poleek anezho, a liamm an oeñsoù kenetrezo.

Evit pep hini eus ar pevar biz diwezhañ ez eus daou genvell, ar c'henvell etre-oeñsoù nesañ hag ar c'henvell etre-oeñsoù pellañ. Evit ar meud ez eus ur c'henvell etre-oeñsoù hepken.

13.1. KORFADUR

Deskrivañ a raimp ar gorreennou-kenvellañ hag an araezioù-stagañ.

13.1.1. Ar GORREENNOU-KENVELLAÑ.

Teir zo anezho, evit pep kenvell:

- penn an oeñs nesañ;
- penn an oeñs pellañ;
- an disk-kenvellañ.

13.1.1.1. Penn an oeñs nesañ.

Dezhañ stumm ur pole, emañ e kenvell gant diaz an oeñs pellañ.

13.1.1.2. Diaz an oeñs pellañ.

Diskouez a ra div bezel a zo e kenvell gant an daou dalbenn eus ar boleenn.

13.1.1.3. An disk - kenvellañ.

Emañ gant an disk-kenvellañ an hevelep kefridi hag hini ar c'henvelloù kreizdorn-oeñsoù: reiñ astenn ha

donder d'ar pezelioù.

13.1.4. An ARABZIOU-STAGAÑ.

Ouzhpenn ar pourc'had enlennet e-kefin an disk-kenvellañ, e kaver:

- ar stagelloù kengostezel lec'hiet war dalbenn kostezel ar c'henvell;
- lienstirenoù ar c'higennoù astenner;
- ar stagelloù oeñs-pezel.

13.2. Ar FIÑVOU.

Ar c'henvelloù etre-oeñsoù zo ar sez a fiñvoù lies-seurt:

- plegañ,
- astenn,
- pellaat-nesaat.

13.2.1. Ar PLEGAÑ.

Plegañ zo anezhañ kas gourfenn ar bizied war-du penn eskern ar c'hreizdom en ur blaenenn a-saezh.

13.2.1.1. Aheliou ar plegañ.

A-zremm emaint, lec'hiet en ur blaenenn a-dal. Tremen a reont dre benn an oeñsoù.

13.2.1.2. Savlec'h-derou.

Emañ an ezel-krec'h a-hed ar c'horf, palv an dorn tro ouzh diaraog, meud ouzh diavaez.

13.2.1.3. Deskrivadur ar fiñv.

- Fiñv hollat: talbenn a-balv an oeñs pellañ a dosta ouzh hini an oeñs nesañ.

- Fiñv ar gorreannoù-kenvellañ: gourfenn nesañ an oeñs pellañ a riskl war c'hourfenn pellañ an oeñs nesañ a ziadreñv da ziaaraog.

13.2.1.4. Heled.

Er c'henvelloù etre-oeñsoù emañ war gresk an heled eus ar biz-yod d'ar biz-bihan.

- Etre 90° ha 135° er c'henvelloù etre-oeñsoù nesañ;
- Etre 80° ha 90° er c'henvelloù etre-oeñsoù pellañ.

13.2.1.5. Bevennadur.

Ar fiñv zo bevennet gant stok kigennoù ar bizied an eil ouzh eben.

13.2.2. An ASTENN.

Gouzañvat eo an astenn.

Mannel er c'henvelloù etre-oeñsoù nesañ e c'hell an heled tizhout 30° er c'henvelloù etre-oeñsoù pellañ.

Ar fiñv zo bevennet gant stegadur ar pourc'had, ar stagelloù hag ar stirenoù.

13.2.3. Ar PELLAAT-NESAAT.

Gouzañvat eo ar fiñvoù-se, dister e heled.

13.3. Ar C'HIGENNOU-LOC'HAÑ.

- Neus anv amañ nemet eus ar plegañ hag eus an astenn.
- Diforc'het e vez studienn ar pevar biz diwezhañ diouzh hini ar meud.

13.3.1. Ar PLEGAN.

Kigennoù bleger:

- Evit ar pevar biz diwezhañ:
  - Kenvelloù etre-oeñsoù nesañ: kigenn bleger bas ar bizied;
  - Kenvelloù etre-oeñsoù pellañ: kigenn bleger don ar bizied.
- Evit ar meud:
  - Kenvelloù etre oeñsoù: kigenn bleger hir ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENNADUR
Kigenn bleger bas ar bizied	- Penn a-baler: war arskodenn greizel ar paler - Penn a-helmo: talbenn diabarzh ar baleg kurunek - Penn a-werzhid: ribl a-raok ar werzhid war e hanterenn uhelañ	Ribl kostezel eil oeñs ar bizied	Nervenn greizer
Kigenn bleger don ar bizied	- Talbennoù araok ha diabarzh an helmo en e lodenn uhelañ - Ribl diabarzh ar baleg kurunek	Diaz oeñsoù pellañ ar pevar biz diwezhañ	Nervenn greizer ha nervenn an helmo
Kigenn bleger hir ar meud	- Talbenn araok ar werzhid, war e lodenn uhelañ - Talbenn araok ar baleg kurunek war e lodenn diavaez	Diaz oeñs pellañ ar meud	Nervenn greizer

13.3.2. An ASTENN.

Kigennoù astenner: - Evit ar 4 biz diwezhañ:

- Kigenn astenner boutin ar bizied;
- Kigenn astenner ar biz-yod;
- Kigenn astenner ar biz-bihan.
  - Evit ar meud:
  - Kigenn astenner hir ar meud.

KIGENN	PENN	DIBENN	NERVENNADUR
Kigenn astenner boutin ar bizied	Arskodenn gostezel ar palv	4 stirenn, pep hini anezho enlennet war ziaz pep oeñs	Nervenn ar werzhid
Kigenn astenner ar biz-yod	Talbenn adreñv an helmo war lodenn izelañ an dreuzenn	War 3 oeñs ar biz-yod	Nervenn ar werzhid
Kigenn astenner ar biz-bihan	Arskodenn gostezel ar paler	War 3 oeñs ar biz-bihan	Nervenn ar werzhid
Kigenn astenner hir ar meud	Ribl adreñv ar werzhid en e drederenn greiz	Diaz oeñs pellañ ar meud, war e dalbenn a-gein	Nervenn ar werzhid

13.4. Ar FIÑVENTEREZH.

Evit kas da benn fiñventerezh ar c'henvelloù etre-oeñsoù eo dalc'het diloc'h an oeñsoù kentañ.

13.4.1. Ar C'HORNVENTEREZH.

Prizet e vez hep tresañ linennoù-daveiñ.

13.4.2. Ar NERZHVENTEREZH.

Kaset e vez da benn evit ar plegañ hag an astenn:

- Evit ar pevar biz diwezhañ;
- Evit ar meud.

13.4.2.1. Ar plegañ.

13.4.2.1.1. Ar pevar biz diwezhañ.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:
  - Pouez ar vrec'h;
  - Arc'hwel kigennoù astenner an arzorn.
- Muzul:

5 ha 4 Plegañ ar c'henvelloù etre-oeñsoù nesañ.

- Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol, e vizied astennet;
- Derc'hel diloc'h oeñs nesañ ar biz;
- Ar gouziviad a bleg oeñs krenn pep hini eus e vizied;
- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn araok an oeñs krenn.

5 ha 4 Plegañ ar c'henvelloù etre-oeñsoù pellañ.

- Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol, e vizied astennet;
- Derc'hel diloc'h an oeñs krenn;
- Ar gouziviad a bleg e oeñs pellañ;
- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn araok an oeñs pellañ.

Notenn: ne vez ket prizet er pleustr an derezioù 3, 2, 1.

13.4.2.1.2. Ar meud.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:
  - Pouez an arvrec'h hag an dorn.
- Muzul:

5 ha 4 - Gouziviad en e azez, kein e zorn war an daol;

- Derc'hel diloc'h oeñs nesañ ar meud;
- Ar gouziviad a bleg an oeñs pellañ;
- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn araok an oeñs pellañ.

1 ha 0 - An oberataer a bafal stirenn kigenn bleger hir ar meud war dalbenn araok oeñs nesañ ar meud.

Notenn: ne vez ket prizet er pleustr an derezioù 3, 2.

13.4.2.2. An astenn.

13.4.2.2.1. Ar pevar biz diwezhañ.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:
  - Pouez ar vrec'h;
  - Arc'hwel kigennoù pleger an arzorn.
- Muzul:

5 ha 4 Astenn ar c'henvelloù etre-oeñsoù nesañ.

- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, tro ouzh traoñ ar palv anezhañ, e vizied pleget\*;
- Derc'hel diloc'h oeñs nesañ ar biz;
- Ar gouziviad a astenn oeñs krenn pep hini eus e vizied;
- Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn

adrenñ an oeñs krenn.

- 5 ha 4 Astenn ar c'henvelloù etre-oeñsoù pellañ.
- Gouziviad en e azez, harpet e zorn, tro ouzh traoñ ar palv anezhañ, e vizied pleget;
  - Derc'hel diloc'h oeñs krenn ar biz;
  - Ar gouziviad a astenn oeñs pellañ pep hini eus e vizied;
  - Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn adreñv an oeñs pellañ.

Notenn: ne vez ket prizet an derezoù 3, 2, 1.

13.4.2.2.2. Ar meud.

- Diloc'haat bevedel ar fiñv:
  - Pouez an arvrec'h hag an dorn;
  - Arc'hwel kigennoù nesaer an arzorn.
- Muzul:

- 5 ha 4
- Gouziviad en e azez, ribl diabarzh an dorn war an daol;
  - Derc'hel diloc'h oeñs nesañ ar meud;
  - Ar gouziviad a astenn an oeñs pellañ;
  - Ar gwered-harz zo lakaet war dalbenn adreñv an oeñs pellañ.

- 1 ha 0
- An oberataer a bafal stirenn kigenn astenner hir ar meud war dalbenn a-gein an dorn etre penn kentañ askorn ar c'hreizdorn ha diaz eil askorn ar c'hreizdorn.

13.5. SAVLEC'H A ARVER GWELLEK.

Sellout ouzh 11.5. ha 12.5.

13.6. DISNEUZIADURIOU KLEñVEDEL.

O rannañ a reer e daou rumm:

- Disneuziadurioù arzeuet:
  - Plegadur ar c'henvell etre-oeñs nesañ hag oeñs krenn da heul torr faskienn gil an dorn;
  - Plegadur ar c'henvell etre an oeñs krenn hag an oeñs pellañ da heul torr stirenn astenner dres araok hec'h enlennadur war an oeñs pellañ;
  - Plegadur ar c'henvell kreizdorn-oeñs da heul torr stirenn kigenn astenner boutin ar bizied;
  - Astennadur ar c'henvell etre an oeñs nesañ hag an oeñs krenn da heul torr pe gwanidigezh kigenn bleged bas ar bizied;
  - Astennadur ar c'henvell etre-oeñs krenn hag oeñs pellañ da heul seizi, pe torr stirenn kigenn bleged don ar bizied;
  - Astennadur ar c'henvell kreizdorn-oeñsoù ha war an dro plegadur an oeñsoù krenn ha pellañ da heul gwanidigezh ar c'hig- ennoù etreeskernel;
  - "Dorn-skilf" da heul seizi nervern an helmo;
  - "Dorn a gouezh" da heul seizi nervern ar werzhid;
  - Plegadur ar c'henvell kreizdorn-oeñsoù ha war an dro plegadur ar c'henvell etre an oeñsoù nesañ ha krenn, astennadur ar c'henvell etre an oeñsoù krenn ha pellañ e kleñved Dupuytren;





